

9777

Liziri :
eun danevell
gand J. Abasq

An douristed
e Breiz

NEVEZ

N° 7

GOUERE - EOST

1977

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 7 - GOUERE - EOST 1977

Rener : Andreo Merser
Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 6 lur

Koumanant-bloaz : - priz ordinal : 40 lur
- koumanant-skoazell : azaleg 50 lur
- studieren, soudarded : 30 lur
- liseaned : hanter-briz, 20 lur
- broiou estrañjour : 50 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennou-post a zo da veza laket war ano P.-M. Mevel, C.C.P. 1499-55
Roazon.

Disklêriet hervez al lezenn : trede trimiziad 1977.

C.P.P.A.P. : n° 34.627.

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin,
le Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an
aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e « Brud Nevez », n'emaint ket
da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet
anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

Golo gand J.-P. Laforgue.

* - J. Abasq : Liziri	P. 2
γ - Charlez ar Gall : Disterachou diwar netraig : Bale gand an amzer	P. 13
γ - F.B. : An douristed e Breiz hag al leoriou da henchha anezo	P. 17
x - F. Broudig : Petra dalvez istoriou Asteriks ha Lucky Lucke e brezoneg ?	P. 24
x - Brud ar yez hag ar vro	P. 27

LIZIRI

« Evidon-me, pa vo deuet ar poent, ne jomin ket eur vunutenn hirroh; paz eur vunutenn !... »

Setu ar pezh a doue Per ar Hemener dezañ e-unan, ha d'an nebeud mignoned a gemere ar boan da zelaou anezañ.

Ar vicher gelenner a zo unan gaer, a lavar an dud a volontez vad. Beza e-kreiz nevez-amzer ar vuhez o tispaka he bleuniou, rei d'ar yaouankizou ar gomz, ar skiant hag ar furnez o lakafe barreg da gerzed dre henchou ar bed, beza an treizer a zoug ar zevenadur dijouz ribl an amzer dremenet etrezeg hini an amzer da zond ! Gand ar mennadou uhel-se eo e-noa Per dibabet e vicher, hag ive ablamour e-noa bet c'hoant ranna ar blijadur e-noa kemeret o teski yezou estren.

Pebez dizouezenn, avad ! Eur halz euz e nerz a veze kollet o klask sioulaad an trouz hag ar freuz e-pad ar henteliou; nag a speredou a oa chomet serr da gaerder al lennegezh ! ha flemmet ha goullet e oa bet gand digasted pe krizder ar re yaouank en e geñver.

Dre ma tremene ar bloaveziou e oa deuet ar herse da stumma e zoare beva, e galon, e zremm zoken. Pellaad a reas muih-mui diouz an dud, evid tremen e amzer vak, sioul, tavedeg, gand e wreg hag e verh. D'e zaou-ugent vloaz e oa marvet e wreg; pemp vloaz war-lerh, e verh a oa eet da labourad da vro-Skos ha ne zistroe nemed ral d'ar gêr. Per a oa chomet e-unan-penn, skodeget dirag e blanedenn dizaour, stag ouz rod al labour a rulle gantañ n'ouie ket etrezeg petra. Ma ne ziskroge ket, e oa ma kave eur fent trist o kenderhel, aheurtet, gand an hent ma oa bet touellet gantañ.

A vloaz da vloaz, e oa deuet da gemered eur blijadur c'hwero o verzoud merkou an amzer hag ar beh garanet

donnoh-donna war e zremm. E-pad ar vakansou ez ee da vale bro, hag e tibrade pouez al labour diwar e ene. Pa en em wele er melezour a-raog adkregi gand ar skol, e veze dirouvenn e dal, distenn e javedou ha livrin e zioujod, hag en e zaoulagad e pare flamm ar spi. Med goude eun nebeud miziou kelenn e sante eur skoulm o startaad en e ziabarz, ha ne helle ket miret ouz ar hrizennou da gleuza e kreiz e zaoulagad. Daou zen a oa anezañ e gwirionez, hini penn kenta ar bloaz hag hini ar penn diweza, an eil oh ober eun tammig goap ouz egile. Ha gand ar goap-se e teue da Ber nerz da vond war a-raog.

Nemed, pa oa deuet e dri-ugent vloaz, ne zaleas ket da rei e zilez. Greet e oe eun tammig gouel evitañ a-raog mond kuit. Rener ar skol a lavaras pebez kelenner, hag all... Per a respontas pegen plijet e oa hag all... Pa oa evet ar banne muskadig ha debret eur wispidenn pe ziou, ne oa netra da ober ken. Da beleh ez afe da dremen e retred, a oe goulennet digantañ. « Oh ! 'barz eul lochenn bennag, louz ha barveg ! » a responte.

Hag an dra-ze a oa bet e zoñj, da genta. Distrei da veva da di bihan e gerent, hag adkavoud bed kouer e yaouankiz; med amzer e-noa bet da weled e oa deuet bed e yaouankiz da veza evitañ eur bed estren, ma ne oa eñ ennañ nemed eun tourist. Gwelloh e kavas prena eur rann di en eur gêr vraz a-walh, tostig d'e vro hinidig. Evel-se, a zoñje, e vije kompezet mad a-walh e vuhez; etre kêr hag ar mêziou.

Ar rann di e-noa dibabet a oa er c'hwehved estaj en eun ti a zeiz. Bez e oa eur bignerez ennañ, an dra-ze a vefe a-bouez pa deufe da gosaad. Dre e brenestr e helle gweled en traoñ eur blasenn drêz, ha pellohig eul letonenn az ee war ziribin beteg eur stêr ledan a-walh. War al letonenn e oa eur skaon, pe gentoh daou skaon kein-oh-kein, unan troet war-du ar stêr hag egile war-du an ti. Eur foenneg vihan, eun devez arad marteze a oa en tu all d'ar stêr, gand kaerou haleg en daou benn hag eur hleuziad lann war e hirder. En tu-all d'ar hleuz e pigne parkeier douar labour beteg lein ar sun. Adlodennet e oa bet ar bastell-vro, anad oa, med an dud o-doa gouezet delher d'ar foenneg ha d'ar parkeier stumm goudor, degemeruz an amzer goz.

Ma oa deuet da jom e kêr, e oa dre ma felle dezañ ledannaad e zeskadurez diwar-benn an arzou e-noa lezet a gostez, mui pe vui, e-pad e amzer labour. Koulz lavared bemdez e veze, er gêr zivorfil-mañ, abadennou pezh-c'hoari, muzig pe filmou, ha prezegennoù savet gand breuriezou a beb seurt. Per 'n-oa ket amzer da veza enoet. Eurveziou hir a dremene ive en ti-leoriou kêr. Dalhet e-noa kerse d'ar studiou keltieg e-noa boulhet e-pad ma oa bet studier, hag

e-noa ranket dilezel goude-ze. Dre jañs, a-du kuzul an ti-kêr evid gwrizienna ha ledannad an deskadurez verzoneg ha keltieg, ha Per a gave peb tra red evid seveni e hoant. Kroget oa da vad da zeski lwerzoneg, ober a ree berz a-walh. Dre ar studiou-se e sante e-noa kavet eur pal nevez d'e vuhez. A-hend-all, plijoud a ree dezañ ive pourmen dre ar ruiou d'an euriou ma vezent leun a dud; seblantoud a ree dezañ e startae e grog er vuhez oh en em gemmeska gand an dud, hag an engroez e gemere eur ster splannoh-splanna dre ma teue da anavezoud muioh-mui a zremmou. Nemed ne gave tro da gomz ouz den ebed.

Eun draig all, dister dreizañ e-unan, a oa deuet da frealzi anezañ. Gwerzet e-noa e garr-tan, o soñjal n'en-defe ket ezomm anezañ; med dalhet e-noa, dre eur froudenn, ar velo e-noa prenet gand e arhant kenta. Ne oa ket bet pignet warni e-pad bloaveziou : gweled eur helenner war velo a vije bet ken farsuz, e-doug an ugent vloavez diweza ! Bremañ avad e hellfe ober ganti adarre. Mond a reas war ar mêz, e-barz eun hent striz, evid êsêoud anezi. Eur zouez e oa dezañ he haoliata ar wech kenta : aonig e oa, hanter drellet e oa e benn, a-veh ma ne oa ket bet kouezet. Med buan e oa deuet da hardisaad, ha gand fiñv e izili ha nerz e gorr o startaad e oa eil-ziwanet ennañ e blijadur a wechall. Dre ma kerze ganti e wrïe an amzer-vremañ ouz an dremenet, e liamme ar mêziou ouz kêr. Beb mintin e kemere anezi diouz eul lab ouz kostez kleiz an ti, hag ez ee ganti da brena ar gazetenn er buro-butun tosta, hag e ree eun droiad dre ar ruiou, re goz, re nevez, a-raog distrei da lenn e gazetenn war ar skañon pe en e rannidi. Goude kreisteiz ez ee da redeg war ar mêz, o klask an henchou goudor ha diac'hub a girri-tan. Seder oa a gorr hag a spered, ne zante ket e oad rag niver e oad ne zinifie netra, gand toud an traou e-noa da ober ne wele ket red an amzer.

Digand e verh e reseve daou lizer ar miz, hag e skrive dezi diou wech ar miz. Hi ne zeue ket ken war e dro, ne bede ket anezi zoken. An ere tano ha dister-se etrezo a oa a-walh evitañ. « Gand ma 'z eo euruz el leh m'emei », a zoñje. Soñjal a ree ive e oa eñ eun den digas, yen. Eun tammig kerse a zave ennañ a-wechou, ne vefe ket bet donnoh an emgleo etrezo : ne oa nemed keleier bihan en o liziri. Koulskoude, ken boazet e oa da reseo anezo ingal, ma veze diêz e benn pa n'en em gavent ket d'ar poent. Neuze ne helle ket chom heb paseal nousped gwech, war-dro deg eur vintin, dirag ar boestou liziri en trepas, pa azezet war ar skañon gand eur gazetenn ne deue ket a-benn da lenn, o hortoz ar faktour...

« Setu eul lizer evidoh... »

« Ah ! Digand va merh... »

Dre-ze e oa deuet da ober anaoudegez gand ar faktour. Bez e oa eun den treud, klañvidig, eul liou fall d'e zremm, e javed-traoñ kleuzet diouz an tu kleiz. Bez e oa kozig evid ar vicher, poent dezañ mond war e leve ive. Dinerz e oa e gerzed hag e vouez, e zaouarn o teuler al liziri er boestou a grene, diabil. Heb ehan e veze o fiñval pe o rimia e javed gand e zorn, daoust ma klaske kuzad e boan hag e enkre. Per a ouie, gweloh egetañ douetuz, peseurt kleñved a oa peget ennañ, c'hoant e-noa kavoud gerioù da ziskouez ne jome ked dizeblant, med penaoz frealzi eun den debret gand ar hrign-beo ? Beb an amzer ne veze ket gwelet ar faktour koz, hag e veze kemeret e blas gand unan yaouankoh. Pa zistroe, e veze donnoh kleuz e javed. Ouz e weled e kompene Per talvoudegez ar yehed. Dampontet e veze o soñjal e vefe gouest da ziskleria d'ar faktour pegeid e-noa hoaz da veva, gand muzul ar hleñved. Evitañ e-unan, ne oa muzul ebed.

Nemed avad, goude miziou leun ha seder, e kavas dezañ e oa eun dra bennag, eur c'hwil fall bennag, o turiad e ziabarz. Pe eur skeud o tisliva e vuhez. Ne helle ked merzoud spiz petra oa. Eul latarenn a velkoni a holoe a nebeudou donderioù e ene. A-wechou e kave eur blas melkonioù d'an dra-ze, pa jome pennadod hir da zelled ouz ar parkeier, da skouer, o steuzia goustad e teñvalijenn an abardaez; neuze e save ennañ kan eur barzoneg bennag, hag e teue peoh d'e ene. Med gwechou all a veze, ma kolle peb tra e lemmded, e dalvoudegez. Bez e oa traou ma ouie sklêr perag e oa fallgalonet ganto. Hanter-zac'het e oa war e studiou keltieg : ankounahaad a ree dre ma teske, e eñvor a oa deuet da veza pouz; klasket e-noa implij an nebeud e-noa desket e-doug eur veaj e Bro lwerzon, hag e oa bet dipitet dre ma n'e-noa ket komprenet an disterra ger. E keñver an arzoù ive e oa deuet da veza dam-heuget; e-leh mond donnoh donna en anaoudegez anezo, e seblante dezañ n'o-doa netra a bouez da ginnig dezañ, ne reent nemed ranella atao eun nebeud orbidou lorchuz. En e bourmenadennoù dre gêr pe war ar mêz, en em gave o pellaad diouz an dud ha diouz an traou, klozet warnañ e-unan. Aliez e chome nehet er hroazhenchou : trei a-gleiz pe a-zehou, petra 'verne ? Petra 'verne tra pe dra ? Eur pouez a voustre war e spered, heb ehan, ha ne wele ked penaoz e hellfe e zibrada. Er housked e klaske eur repu. Diwezad e save, goude beza milliget al laboused a ragache da zihuna anezañ a-raog tarz an deiz, hag e veze dinerzet o soñjal en eurveziou hir a oa da veva a-raog koueza en dihoustians. A-wechou e teue dezañ keuz da veza dilezet e labour re abred. Gwechall an tregas e-noa miret outañ, d'an nebeuta, da verzoud kas an amzer. Bremañ avad ne oa netra da guzad outañ ar vag m'edo enni, a zouge anezañ war stêr en amzer etrezeg ar penn diweza.

« Ar retred, a zoñje... Kambr-gortoz ar maro... »

Eul lizer digand e verh, hag eur guchenn baperiou bruderez. Pa oa o lakaad e alhwezig en e hodell, goude beza prennet e voest, e welas eur follenn baper war an douar, pleget. Kouezet diouz unan bennag. Dastum a reas anezi, he displega evid gouzoud da biou e oa skrivet, med ne helle ket lenn heb e lunedou, ha ne grede ket o hemered amañ en trepas gand aon da veza tapet o lenn eul lizer na oa ket evitañ. Mond a reas er-mêz da azeza war ar skaon. Digeri a reas da genta lizer e verh, ha neuze e lakaas ar follen all warnañ evid he lenn ive. Lenn ar pez o oa red evid gouzoud ano ar perhenn pe ano an hini a skrive. Med ne oa, e-giz anioiu, nemed « Anna », en deraou, ha « Da dad », d'ar fin. Marteze, a zoñjas, e kavje eur merk bennag e korv al lizer. Digareziou evid goloi e hoant gouzoud ? Mez e oa en em zila dre guz e darempredou daou zen, eun tad hag e verh. N'eus forz penaoz, al lizer a oa kollet...

« Anna, dond a ran eur wech all hoaz d'az pedi da guitaad ar vuhez diroll emañ o ren. Setu m'emaout nao bloaz warn-ugent hirio, me 'garfe heti dit eun deiz-ha-bloaz laouen hag euruz, med va spered a zo re drist. Abaoe da hwezeg vloaz e kerzez gand eun kent mezuz. Petra 'peus gonezet ? Heuget on o soñjal e c'hoarzedennou ar wazed en em roez dezo, pa gontont o fortun vad d'o mignoned en deiz war-lerh. Anaoud a ran ahanout a-walh evid gouzoud, e donder da galon, n'eo ket ar vuhez-se eo a zo da hoant gwir. Me garje e kavjes eur gwaz siriuz hag a jommfe feal dit, hag a zikourfe ahanout da veva en eun doare deraod. Muioh a levenez a zeu diwar ar mad eged diwar an droug. Da dad. »

Eun dorn all e-noa skrivet e lizerennou bihan sonn :
« Spontet on o soñjal e kollez da ene. Mamm. »

Per a blegas an daou lizer asamblez, terzienn en e vizied. Eur pennad hir e chomas da brederia, nehet, trenket e goustians. Dre hoant ober vad e-noa lennet al lizer, ya, med ar pez a zante bremañ a oa ar blijadur da veza diskennet e donder buhez trubuillet eur vaouez. Ha mez ive o tamzivinoud sekrejou divalo kuzet a-dreñv geriou an tad. Traou ha ne zellent ket outañ, den dizonest. Med, tra souezuz, ar zantimant a leunie e ene a-benn fin e brederiadenn a oa

doujañs, doujañs evid an tad, ar verh, eh en em gave liammet ganto.

Felloud a ree dezañ diskoacha perhenn al lizer. Distrei a reas e-barz an trepas, evid selled ouz ar boestou liziri, ma vefe an ano « Anna » skrivet war hini pe hini. Med ne oa nemed daou anezo, gand al lizerenn genta « A. » dirag an ano famill : « A. Ar Beheg » hag « A. Kervareg. » Gwazed pe verhed ? Goulenn digand ar faktour... med peseurt digarez a hellfe harpa e guriusted e-keñver eur plah yaouank ? Edo o tigeri an nor evid mond er-mêz da aveli e nehans, pa zigouezas e-benn dezañ eur vaouez o tistrei e-barz an ti. Kila a reas da zelher an nor eviti da zond tre, evel ma oa boaz, p'en em zantas skoet, gronnet gand stumm he horv maouez ha broudet gand êzenn he c'hwez vad c'hweg ha lemm. P' e-noa serret an nor war e lerh e troas e benn da zelled outi. Gweled a reas anezi a-zao e kreiz an trepas, o teuler eur zell war an douar tro-dro. Kuit da veza tapet o selled, Per a yeas da azeza buan war ar skaon, hag a zispakas eur baperenn da lenn, e zaoulagad paret war an nor wer. Ar vaouez a oa bremañ en he sao e-kichen dor ar bignerez, hanter-zroet davetañ. He fenn a oa sonn, he horv kreñv a oa stummet brao, gwisket oa en eun doare itron. Petra he-doa klasket war an douar ? Per ne helle ket kredi e vije ar vaouez-se ar « forh » ma oa an hini anvet « Anna », hervez lizer an tad.

Pignad a reas d'e rannidi, hag eh azezas war e wele evid adlenn al lizer. Ma oa Anna hag ar vaouez e-noa gwelet ar memez hini, e ree an tad eur fazi diwar he fenn, an dra-ze a oa sur. Ar gerent a zo techet da gemered aon pa ya o bugale kuit diouto. Soñjal a reas en e verh, e-noa kemeret evid eur penn skañv, hag a oa bremañ ken stabil hag eñ en he buhez. Chom a reas pell amzer, e-pad an abardæz, da zelled ouz ar mêziou o veuzi dindan eur hlizenn dano, o striva da adfurm dirazañ ar vaouez yaouank. Pe liou oa he bleo ? Peseurt dillad oa ganti ? Per n'oa ket bet morse mad da deuler evez ouz an danvezioù resiz : eur zantadur dre-vraz hebken a jome ennañ. E ene a oa leuniet a velkoni hag a deneridigez.

E-kreiz an noz e tihunas en eun taol-kont. Santoud a ree e galon o tarlammad, e spered a oa sonnet, heb ma vefe netra ennañ. En eur vunutenn avad e tarzas ennañ an huñvre e-noa greet : edo Anna, astennet en-noaz war he gwele, oh en em rei d'eun amourouz, hag eñ a oa o vond da zispartia anezo. E spered a jomas killet e-barz pell amzer war an daolenn heuguz-se; mez e-noa evitañ e-unan hag eviti, klask a ree goloi e huñvre gand an eñvor euz ar vaouez deraod e-noa kejet ganti en trepas, mez ne helle ket en em zizober diouz an daolenn lik. Enaoui a reas ar goulou, hag en em

lakaad da lenn eul leor. Dre hir lenn eh en em zilas skeudennou estren en e ene hag e tistroas e deneridigez hag e hellas kousked adarre. Pa zihunas, diwezad, eh en em zantas divorfil. Beh an amzer a oa dibradet diwar e spered.

Eul elfenn a levnez a oa bet enaouet ennañ, hag a badas da sklerijenna e vuhez en devezioù war-lerh. Ne zistroas ket dezañ an huñvre gadal e-noa greet, pe a-veh; floura e ree en e ziabarz an deneridigez velkonizuz a stajez anezañ ouz ar vaouez. Kaoud a ree dezañ kleved eur galv d'eur vuhez nevez, nemed ne wele ket mad pehini. Tri bloaz ha tri-ugent, e verh pemp vloaz ha tregont, Anna eiz vloaz warn-ugent... Eur vez e vefe... Med karantez - ma oa karantez - karantez eun tad eo a oa diwanet ennañ e-keñver Anna. Ar c'hoant da ginnig dezi e warez, da henchañ anezi, da frealzi anezi gand tommder e zoujans. Nemed pa adlenne lizer an tad, e wele eun nor all o tigeri war c'hoantou mezuz e-noa moustret warno e vuhez-pad. N'eus forz, a zoñje : gwelloc'h eo an arvar-mañ, ar vez zoken, eged ar vuhez dilufr, dihoanag a renen araog. Hag e kendalhe da voueta e zantimanchoù disheñvel kerkoulz ha ma felle dezañ kredi e oa Anna hag ar vaouez en trepas ar memez hini.



Eun devez, e-pad m'edo o pourmenn e kreiz kêr, e kavas dezañ e-noa gwelet anezi : eur vaouez a oa o vale dirazañ, ar memez ment, ar memez kerzed a skoas e galon er memez

doare hag an dro genta. Riñvedet e chomas e zaoulagad warni beteg ma oa kuzet e-touez an dud. Med n'oa ket re zur e oa hi ha bremañ e fellas dezañ diluzia e arvar. Douster an huñvre e-noa lusket e ene a oa kroget da drei da derzienn. D'an abardaez, a-raog serri e volejou, e chomas da zelled ouz ar mêziou dirazañ : noz oa, kleved a reas trouz eur heflusker, hag e welas eun trakter oh en em stleja war ar run, o toulla an deñvalijenn gand e houloù lemm. Evel m'en-dije e galon deveret eur bomm nerz digand an ardívink, e startaas ennañ ar youl da gas e hoant-gouzoud da benn. Goulenn digand ar faktour, ma vefe red. Adlenn a reas al lizer a-raog kousked, hag e lakaas war e ballenn-wele.

Antronoz e-noa greet e dro e kêr, prenet e gazetenn, a-raog deg eur. Azeza a reas war ar skaon d'he lenn, troet etrezeg an ti. Koll a ree heb ehan steuenn e lennadenn, sachet ma oa e zaoulagad etrezeg an nor. Santoud a ree an nehamant adarre o hounid war e volontez. Penaoz en em gemered gand ar faktour ? Pegen drol e vefe goulenn : « Pe ano familh he-deus ar plah yaouank a zo Anna heh anobihan ? » Hanter-zavet e-noa eun istor diwar-benn eun mignon dezañ e-noa goulennet kelou diwar-benn eun Anna bennag, pa antreas an den e-barz an ti. Per a zavas evid mond war e lerh. Ar faktour a zilasas eur vozad liziri, hag a lakaas anezou war an daol dindan ar boestou. « Ah ! setu eul lizer deoh », emezañ. « Hag al lizer-mañ a rankan rei d'ar perhenn e-unan... », a lavaras dezañ e-unan, en eun huana-denn skuiz. Hag e kerras etrezeg ar bignerez, o lezel ar pakad liziri war an daol. Per a furchas en o zouez, hanter-benfollet, heb dispega e zell diouz dor ar bignerez.

Dre e kavas eul lizer skrivet da « Anna Kervareg ». Ar bignerez a oa o tiskenn, bizied tredanet Per a zibabas buan al lizer hag e stlapas en e hodell. Mond a reas d'e gambir gand an deleziou, evid nompaz kejoud gand ar faktour.

« Pebez genaoueg », a zoñjas. Penaoz e hellfe en em zifreta diouz e laeroñsi ? Per ar Hemener, kelenner war e leve, o laerez liziri skrivet da verhed yaouank ! Mond ha dond a reas dre e rannid, sellad dre ar prenestr, gourvez war e wele, med distrei a ree atao daved al lizer e-noa lakeet war e daol-skriva, strobinellet gantañ.

« Eur banne tizan da zistenna va nervedennou. » Goude-ze e teufe ar furnez dezañ en-dro. Hag e-nefe nerz da ziskenn evid teuler al lizer e boest Anna. A-walh oa gouzoud heh ano, displeget penn-da-benn war ar golo. Piu e-noa skrivet al lizer ? Eun dorn gwaz oa, di-abil a-walh. Ne oa ano ebed tro-kein ar golo. Petra oa e-barz ? En e empenn eh en em stumme frazennou mezuz. An dour war an tan a oa o vourbouillad, eun êzenn deo o sevel diwarnañ. Euz

donderiou ene Pêr e savas darvez eur bedenn goz : « arabad... » med e zaouarn dieub o-doa dija soubet ar golo en êzenn, hag e vizied a zispege, gand herr hag evez, teod ar golo.

Azeza a rankas da lenn, ha leda al lizer a-blad war an daol. Souezet oa gand ar pez a skrive an den. Ne oa nemed munudou didalvez, hag eur pennad hirroh diwar-benn eun dro-gaer edo ar skriver o vond da aoza, hag a zigasfe arhant dezañ. Ar geriou diweza avad a skoas Per a-greiz e gorv : « Bez en da wele p'en em gavin fenoz. Bez da vragez gwenn hebken ganit. Ne blij ked din koll amzer pa vezom asamblez. »

Eun houlenad doñjer a veuzas Per. Ar skeudenn euz ar gwaz hag ar vaouez ô vond d'en em bara evel chatal a freuzas ar wiadenn a romantelez e-noa savet en-dro da Anna. Dizouezet mad e oa, yeneet en he heñver. Ne hellfe beza netra kenetrezo, mar doa evel-se e veve he buhez, ma tegemere gwazed hebken evid eur c'hoari-korv buan ha berr. « Eur hast, n'eo ken », a lavaras, hag e teuas eur peoh c'hwero ennañ. Diliamm et oa, bez e helle lezel Anna da ren he buhez en doare m'he-doa dibabet, kement-se ne oa ket evitañ. Adpega a reas teod al lizer, ha diskenn da deuler anezañ e-barz boest Anna.

Nemed e talhas kerse d'e huñvre. Hag e soñje e lizer an tad, a oa chomet gantañ. An tad e-noa hoaz fizians en e verh, hag a anaveze anezi mad, emichans. Petra a aotree Per da varn anezi en eun doare ken garo ? Ma oa bet dihenchet gand tud fall, pe zoken gand he youlou fall, daoust ha ne heuille ket eun hent gwelloc'h ma vefe diskouezet dezi gand eun den hag a gomprenfe anezi ? Ar zoñjou-se a droe en e benn, e-pad ma rede war e velo war ar mêz. E gonnar a zistanas, e greiz a vlotaas, e deneridigez a gargas adarre e galon. Daoust da beb tra, e soñje e-noa eun dra bennag da ober eviti. Pellaad anezi diouz an dud n'oa nemed eur verhodenn da hoari evito. Sikour anezi da ziskoacha ar c'hoantou donna a oa enni, a oa mouget diwar goust he buhez skañv. Ledanaad he spered, digas anezi e-barz bed ar furnez, ar skiant, an arz... Santoud a ree e oa galvet da zeveni ar gefridi-ze. Chom a rafe en he hichenn, heb goulenn netra diganti nemed he fizians, o kinnig dezi e warez, e deneridigez, e zoujans. Daoust hag e plijfe dezi ? Kozig e oa, med dond a reas sonj dezañ e-noa klevet lavared e oa merhed hag e plijfe dezo gwazed koz : anavezet e-noa gwechall eur studierez hag he-doa karet eur helenner glaz e vle. Neuze e oa bet heuged gand an dra-ze; bremañ e oa digorroh e spered. Anna, a zoñje, he-deus marteze bet he gwalc'h euz trivliadou entanet ar horv, ha bremañ, e kavfe gras en em lakaad e gwasked eun den fur hag a zigasfe ar

peoh dezi. Ha goude ma ne vefe ket da jom gantañ da viken, ma tilezfe anezañ e hellfe beza evid eun doare-beva gwelloc'h hoaz, ha Per a vefe kontant da veza bet he mignon e-pad ar pennad-hent se.

« Skriva a rankan dezi », a zoñjas. A-raog ma vefe re ziñvezad. Al lizer a oa frammet en e spered a-raog ma azezas ouz e daol d'e skriva.

« Kredi a ran skriva al lizer-mañ deoh ablamour e karfen ober hoh anaoudegez. Ho kweled a ran beb an amzer, hag e karfen darempredi ahanoh ma plijfe ganeoh. Arabad deoh, me ho ped, beza feuket gand ar goulenn dihortoz-mañ. Ne lavaran tra nemed gand ar brasa doujans evidoh. Me zo o chom en ti-mañ va-unan, koz a-walc'h on da veza ho tad, med marteze va mignoniez a hellfe laouennaad ahanoh evel ma vefen laouenneet gand ho mignoniez. Fizians am-eus ho pezo ar vadelez da respont din, gand eur gerig lakeet em boest-liziri. »

Adlenn a reas e lizer. Ne oa netra e-barz da ober aon d'ar vaouez yaouank. Derhel a reas penn d'e hoant da ziskenn dioustu d'hel lakaad en he boest. Gwelloc'h oa gortoz an deiz war-lerh, daoust m'e-noa aon, pa vefe distanet dezañ, e kollfe e nerz, hag e lezfe da vond da ged an dro-vad-mañ da veza euruz. Lakaad a reas an adres war ar golo, med ne glzas ked anezañ.

E-kreiz e gousk e tihunas, gand eul lamm-kalon. Edo o paouez huñvreal e-noa adstaget ouz e lizer : « Bez da vragez gwenn hebken ganit... » Red e oa dezañ elum ar goulou, mond beteg an daol, digeri ar golo. Nann, eul lizer deread e oa penn-da-benn.

Da zeg eur eh en em gave a-gevred gand ar faktour en trepas. Eun hejadenn penn a rejont an eil d'egile. Ne oa nemed eun nebeud paperiou bruderez evid Per. Chom a reas da ober neuz da furchal en o zouez. E lizer a oa gantañ en e hodell. P' e-noa ingalet al liziri, ar faktour a ruzas adarre etregez ar bignerez. Per a riklas buan e lizer e-barz boest Anna, hag ez eas da azeza war ar skaon. Tastornad a ree e vozad paperiou, med ne helle ked staga e evaz outo. Daou filip a zeuas da bigosad ar grouan dirazañ. Per a jome hanter-zeizet gand ar pez e-noa greet.

Trohet e oa e alan, pa welas Anna o tond er-mêz euz ar bignerez. Gwisket he-doa eur vroz verr, a zispake he divorzed leun ha kreñv. Trellet e oa Per, ha koulskoude e soñjas « n'eo ket evidon-me... ». Dioustu war he lerh e teuas eur gwaz yaouank, gand eur bragez gris hag eur jupenn lèr. Pêr, ar genaoueg, n'e-noa ket soñjet e vefe eur

gwaz gand Anna. Ar vaouez a zigoras he boest, a dennas eur pakad liziri er-mêz. Unan a lakaas en he sah... hini he zad, emichans. Gand an eil lizer e reas he fenn eun hejadenn dêr, souezet. Lenn a reas gand aked, he gouzoug astennet eun nebeudig. Ar gwaz a dostaas, a lakaas e zorn war he skoaz. Anna a ziskouezas Pêr gand eun hejadenn-benn, hag a roas al lizer d'egile da lenn. Ar gwaz a hoarzas goustad.

handi
de designina
Anna a guitaas he hamalad, hag a zeuas etrezeg Pêr a gammedou dic'heg. Pêr a zelle ouz he dremm, o hortoz marteze, memez tra, eul luhedenn a vignoniez; mez an dremm a oa faguz. Stoui a reas e benn, hag e welas he daouarn o regi al lizer a dammou bihan. He bizied a zigoras, hag a strewas an tammou e-harz e dreid. Gweled a reas ar gwaz o tostaad, e vreh o kemered he dargreiz. Kleved a reas o hammedou o pellaad, Anna o teuler eur hoar zadenn dibreder.

in o gant
Ar faktour a reas eur zell ouz an tammou paper war ar grouan. Pêr a zellas outañ o kerzed, skuisoh eged biskoaz. Va breur er gozni.

Stoui a reas da zastum e lizer. Dinerz oa e zivesker, kropet e vizied. Daou pe dri damm a oa gantañ en e zorn, pa zeuas eur fourradenn avel hag a gasas an tammou all da nijal. Per a zigoras e zorn hag a lezas ar re all da goueza.

J. ABASQ

DISTERACHOU DIWAR NETRAIG

Bale gand an amzer

A-veh gwintet an dumporellad velchon gantañ e tal al loch-karr koz, ha kilet an traktour dindan ar wezenn fiez vraz e traoñ al leur, Veig a redas betek an ti d'ober eun troh d'e varo araog diskenn d'ar vourh. Ar razouer a fraoñvas a dourtadou, evel eur wespedenn paket e gwask eur rideoz. Eur « Remington-Rollamatic » prenet gand Lan d'e vab-kaer e foar-diskouezadeg Kemper, araog koueza klañv.

Jani, o kleved ar rouzmouzerez, a dostaas, eur pez dillad ganti war he breh.

— Setu amañ eur bragou difañk dit. Ne fell ket din ez afez dirag an dud gand an hini a zo ganez. Abaoe out bet o riñsa lenn ar zaout gantañ ez euz pri dioutañ betek ar penn-daoulin.

Araog dond da vab-kaer da Wernalin, Veig e oa bet digouezet gantañ paka flipadennou meur a wech diwar goust e wiskamant na veze ket atao diouz ar hiz. Med Jani, e bried yaouank, a ouie an doareaou. Veig, eta, a wiskas ar blue-jean kinniget dezañ, hep marhata. Ha dao ! eul lamm war e Vespa (1).

Pemp munut diwezatah edo er vourh, e sal an ti-kêr. Dirag eur pez mell kartenn dreuzweluz peget ouz ar speurenn, eun den deut euz perz ar Prefed a oa krog da zisplega d'ar gouerded war beseurt reolennoù e vije diazezet ar strolladour en o farrez.

— Bremaig, emezañ, pa mo echu gand va disklêria-
duriou e vo ho tro deoh da gaozeal. Marteze ho-po tra
pe dra da houlenn diganin. Traou a zo, posubl eo, ha
n'int ket sklêr evidoh. Ar haier braz, amañ, m'ho-peus
klemmou da zevel...

Ar haier braz a gouezas d'an douar gand an taol
meill-dorn spontuz a skoas Loig Pouldourou warnañ en
eur sakreal :

— Mil hast ! Klemmou ? N'eo ket ar pezh a vanko
deoh, bezit sur. Ma sentan ouz lakizien eveldoh e
ranko va zaout mervel gand ar zehed.

— ... ?

— Ya ! Va zaout a zo kondaonet ganeoh da vervel
gand ar zehed peogwir ar gwella foenneg am-oa,
« foenneg ar gïoh », ha « gwaz ar beler » a zo staget
ouz douarou Gwernalin : ouz douarou tad-kaer hemañ
an aotronig-mañ. - Hag e astenne e chig trameg Veig.

Paotr Kemper a glaskas rei da gompren da Loig, dirag
ar hadastr, e helije e zaout diskenn da « waz ar beler »
ken êz hag araog, hag êsoh zoken, peogwir edod krog
da zigeri' eun hent nevez a-hed « foenneg ar gïoh »
etre Pouldourou ha Gwernalin.

Daoulagad Loig a zalhe da riboulad evel kanetennoù
dir.

— Kadastr pe zigadastr, na gomzit ket din euz
henchou nevez. Re a henchou a zo dija etre Pouldou-
rou ha Gwernalin evid an darempredou am-eus da
houzañv gand tud ar gêr-ze, dreist-oll abaoe m'eo deut
ar brabañser yaouank-mañ da vab-kaer du-ze. Hag eun
dra all a zo c'hoaz. Pa vo freuzet kement kleuñv a zo,
pilet an diweza gwezenn, tousmahet kement tra gand
ar bull, e pe leh e kavo al loened repu ha gwasked ?
Ha penaoz e vint diwallet ? Pa welan furlukined
eveldoh dirazon...

Eur gwall vegad e oa hennez da lonka. Paotr ar hadastr
a zavas, d'e dro, war e gillorou :

— Bezit seven, mar plij. An implijidi o-deus adloden-
net an douarou dre amañ ha merket plas ar mein-bonn
nevez, n'emañ ket o micher ganto da zeski. Hag al
labour a zo bet greet hervez ar reolennoù-stad. Evid ho
mad deoh-c'hwil, troher-buzug a zo ahanoh ! Abaoe
bloaveziou ha bloaveziou e oa krog ar gouered da

glemm. O tamall d'ar Gouarnamant chom hep soursial
outo. Ha bremañ pa z'eur stag da zigeri henchou nevez
evito, p'emaer da vad o strola an douarou evid ma vo
plas d'ar mekanikou braz, petra glevom ? Rebechou ha
tamallou dilrhidi kouezet deuz lost ar harr. Chomit ta,
e-barz al lagenn, war ho rêr ma plij deoh !

Ar geriou diweza a oe mouget gand trouz meill-dorn
Loig o koueza evid an eil gwech war ar haier braz.
Veig Gwernalin, gwir eo, n'edo ket ken aze evid
selaou. E gont a deodadou e-noa bet. Ha ne felle ket
dezañ kennebeud tabutal ouz eur penn-dotu.

Er mêz, war e Vespa, e reas diou wech an dro d'an
iliz, heb mall, ar moteur o skei gorreg, sioulig. A-greiz
toud avad, par d'eun tenn, ar marh-tan a drohas kuit,
ar grouan o nijal a-beb tu d'ar rojou. Trameg Kastellin.

Da Gastellin e ranke Veig mond. Troh-trañch. Mond a
ranke da gonta abadenn an ti-kêr d'e dad-kaer a oa
du-ze e « Klafvdi ar Stêr-Aon »... Laha ar pistig a
gontelle e ziabarz, mouda an daboulinadeg a faoute
dezañ e benn o lakaad e zaouividig berô da darza. « ...
tad-kaer hemañ an aotronig-mañ... », « ... ar brabañser
yaouank-mañ... ». Ne oa ket evid padoud hirroh.

Abaoe pemzetez 'medo dindan vedisin, Lan Wernalin e
teue e vugale da weled anezañ beb abardaez. Gand o
oto, Veig ha Jani n'o-deveze dale ebed oh ober o zro e
Kastellin. An tad, evel-se, en-deveze keleier euz ar gêr
ken aliêz ha bemdez. Ar pezh, emezañ, a ree muioh a
vad dezañ evid toud al louzeier e-noa da lonka. Hirio e
oa mall warnañ o weled ar pardaez o tond evid
gouzoud petra vije bet a nevez en ti-kêr.

Pa glevas dor e gambr o tigeri, Lan a jomas souezet.
An heol o para dre ar prenestr korn-zigor war al
daol-noz a verke e tostaed euz kreisteiz, kement ha
toud.

— Te an hini eo, Veig, ken abred ! N'emañ ket Jani
ganez... Eun dra bennag zo c'hoarvezet er gêr ?

— Nann, nann, tad. Droug ebed. Netra... Geo... Hoh
amezeg tosta e-neus droug-komzet eur wech muioh
diwar ho penn. Abaoe ma'oar emaoch amañ, ar galkenn
ne goll tro ebed, pa hell, da zispenna ahanom on daou.
Ha Veig ha kregi da ziskulia peb tra e-noa gwelet ha
klevet en ti-kêr.

Lan a zelaouas, heb fiñval eun neudenn euz e zremm.

Eur pennad mad e chomas dilavar araog en em lakaad da vourkomz :

— N'ouzon ket pegeit e chomin amañ c'hoaz. Pedavare e parein ? Va daoulagad, dre hraz Doue, a jom madig a-walh. Va skiant ivez, kredi a ran. Skañvoh eo din marteze evid da Loig Pouldourou, piou 'oar. An den kêz, anad eo, a zo troet e spered. Hag o roañvi e don an deñvalijenn. Dalloh eo evid ar gêzed a deu da duriad al leur-zi zouar dindan e orolaj harpet an nadoziou anezi. N'eo ket êz dibikouza daoulagad eun den na wel ket sklêr. O ! ne lakan ket e wall gomzou war gont ar fallagriez. War gont e sottoni, ne lavaran ket. Chomet skoachet evel ma'z eo, e-doug ar wech, e stankinier Pouldourou, ar beulke hirio an deiz en em gav gwall abafet. Piou ne vije ket ? Paour kêz den ! O klask ar belost da zibra e varh...

Veig, emañ an heol o vond diwar an daol noz. Ouspenn kreisteiz e vo pa errui er gêr... Lar da Jani ez a gwelloc'h ganin.

Charlez Ar Gall
Brest : gouere 1977

(1) — Goude ar brezel, ha betek ar bloavezioù 60, e veze gwelet motoioù izel rajou bihan dezho. « Vespa » oa ano ar merk anezo.

**Klaskit deom
koumananterien nevez**

Pep hini e goumananter nevez !

40 lur ar houmanant-bloaz da Vrud Nevez
30 lur hebken evid ar studierien
hag ar zoudarded

C.C.P. P.M. Mevel 1499-55 Roazon

NOTENNOU MESK-HA-MESK

An douristed e Breiz hag al leoriou savet da henchha anezo

Beb bloaz, adaleg ma teu an hañv, en em houlenner dre amañ hag-eñ e vo mad ar sêzon pe ne vo ket. N'eo ket heb rêzon, rag Breiz eo an eil rejion e Bro-Hall da zigemer touristed. Ha digemer eun toullad mad a ra : dond a ra kement a dud da dremen o vakañsou dre amañ hag a zo o chom er vro. Deuz a Bariz eo e teu ar peb muia anezo bepred, war-dro 40 %, ha kaer e vez klask - med daoust ha klask a reer e gwirionez ? - sachha an estranjourien da zond ive da dremen o vakañsou e Breiz, betek-henn, ma teu muioh-mui, ne deu ket c'hoaz eur bern (1).

Setu eo sklêr an traou : ma vez berniou touristed o tond, e vez gwelloc'h a ze an hañv evid an oll re a denn o gounidegez e stumm pe stumm euz an douristed, ha dreist-oll evid ar re eo o micher digemer anezo. Ma teu nebeutoc'h, pe ma vez berroh an arhant ganto, pe c'hoaz ma vez fall an amzer, neuze e vez disterroc'h gounidegez ar re a zo o veva diwarno.

AFER AN TREZENNOU DILASTEZ...

Kant vloaz 'zo, eh errue an douristed kenta e Breiz. Abaoe, nebeud ha nebeud, eo deuet plas an douristelez da veza braz en ekonomiezh ar vro. Ha hirio, n'eo ket diêz santoud an dra-ze. Nag a reuz a zo bet greet, warlene hag an hañv-mañ, diwar-benn an trêzennoù prob ha dilastez, hag ar re louz ha « polluet ». Bez' e rank an dud, evel just, gouzoud peleh eo yahuz da dizañjer mond da neuial, ha peleh n'eo ket. Med daoust m'eo meur a vloavezh 'zo eo e vez analizet an dourmor, diegi a oa betek beteg vremañ o rei da anaoud pere oa an trêzennoù notennet fall.

Rag, na petra 'ta, deuet e hellje beza bet an traou da wellaad etretant. Ma oa louz an dour-mor en eur penn euz eun drêzenn, er penn all marteze ne oa ket, hag all. Aon a oa na vefe dilezet trêzennou a-bez ken buan ha tra gand an dud, ha da genta gand an douristed, hag e vefe greet ken buan all eur gaou braz ouz ekonomiezh eur gêr a-bez. Kement-mañ avad n'eo ket bet gwelet c'hoaz, ha n'eus ket bet soñjet evid ar mare e vije red serri an drêzenn-mañ-trêzenn.

Kêriou 'zo evid lavared mad, ne vevont ken nemed dre an douristed. An oll gomuniou a zo hed ar mor - hag eun drederenn euz komuniou Penn-ar-Bed a zo stok ouz ar mor - a ranker ober enno mui pe vui a zispignou evid an douristed. Red eo kempenn an traou 'benn an hañv, ober henchou da vond e kement korn a zo, kas an dour hag an elitrisite, renka an traou evid sevel kuchennadou tier nevez, kreski ar porziou da zigemer ar bagou dre lien hag ar yachtou, sevel stasionou da buraad ha da nêtaad an doureier louz, hag all... Traou koustuz peurliesha, ha setu perag, marteze, eo e vez klevet tud 'zo o klemm, rag da dud ar vro eo e vez da bêa, dre an taillou, eul lod mad euz an dispignou-ze.

En em houlenn a reer neuze hag-eñ e talvez ar boan ober kemend-all a zispignou d'ober traou ha ne servijont nemed 3 miz ar bloaz. War ar poent-se koulskoude, n'ema ket tre a du an eil gand egile. El leor a jeografiezh ema o paouez embann diwar-benn Breiz, André Meynier a gred dezañ n'o-deus ket ar bromoteurien a-walh da hounid dre amañ, pa ne bad ket ar sêzon keid ha ma ra er Hreisteiz pe er Menezioù. Diouz an tu-ze, ema an traou o cheñch avad, e meur a gorn.

EUN TI E KEMENT PARK HAG E KEMENT LANNeg

Ha diwar-ze, e teu kudennou all. Rag pa reer peb tra, pe kalz a draou da vihanna, en eur gêr, evid an douristed, e vez diêz peurliesha ober traou all. Ouspenn-ze, gand an eiltiezh a vez dalhet da zevel muioh-mui - e 1975, e oa 153.200 eilti e Breiz, tost d'eun hanter muioh evid na oa 12 vloaz kentoh - ez eus peadra d'en em houlenn hag-eñ ne ver ket krog mad a-benn bremañ da zevel dre amañ ive eur vogel hed ar mor.

Beteg-henn kennebeud, n'eus ket bet kavet eun diskoulm a-zoare d'ar gudenn ziez all mañ. Pe e vo laosket an dud, ar re a hello, da zevel o zi mui pe vui leh ma karint. Pe e kompagnunezou gallouduz eo a zavo touriou uhel gand e-leiz a apartamanchou e-barz. Pe neuze e vo digemeret, dre an POS-ou dreist-oll ha dre schema an arvor, reolennou striz da vired na ve diazezet eun ti e kement park hag e kement

lanneg a zo war vord an aot. Er stumm-mañ eo e hellfe beza dalhet toleadou 'zo en o stad hag en o haerder, evid brasa plijadur an oll, ha n'eo ket evid hini eun dibab a dud nemedken. Krog eo departamant Penn-ar-Bed ha Konservatour an Arvor da brena douar evid se, med daoust ha buan a-walh ez eont ?

An douristed - med n'eo ket i hebken, tud euz ar vro, hag a vez o labourad en eur gêr vraz pe en eur gêr vihan e kichen, a fell dezo ive kaoud o zi tost d'an aot - eo a zo penn-kaoz ma keraa priz an douar, ha ma vez kavet gwelloc'h gwerza douar da zevel ti warnañ, evid n'eo gwerza anezañ evel douar-labour. En eur stumm, e rank al labourerien-douar tehed, e kornioù 'zo, rag an douristed ha rag an tier nevez. N'ouzon ket hag-eñ zo bet greet eur studiadenn bennag da houzoud hag-eñ e oa a-benn ar fin ekonomiezh ar vro koll pe hounid da heul ar chenchamanchou-ze. Eun dra 'zo d'an febeuta : an douristed ne roont ket a labour d'an oll penn-da-benn ar bloaz.

80 % DA GOSTEZ AN AOT

N'eus forz penaoz, da gostez an aot eo e teu ar peb brasa euz an douristed. Eun nebeud bloaveziou 'zo e komzer kalz deuz lakad an douristed da vond muioh e kreiz ar vro, abalamour d'e bindivigeziou ha n'int ket anavezet a-walh, abalamour d'ar mêziou glaz ha peohuz..., ha krog e ver d'ober traou 'zo evid se. Med 80 % euz an douristed a gav gwelloc'h bepred dond da dremen o miz vakañsou war vord ar mor.

Al lodenn vrasa ive, eur wech erru en eun tu bennag, prenet pe feurmet ganto eun ti pe eur gambr, eur plas da lakad o zeltenn pe o haravanenn, pe c'hoaz eur plas en eur poñz da lakad eur vag, ne jeñchont ket nemeur a blas. Ar peb muia eo ral a-walh dezo, war a zeblant, pourmen euz eun eil kêr d'eben d'ober tro ar vro a-bez, zoken ma vez klasket tamm pe damm - hervez an amzer a ra - dizoloi ar horniad leh m'emaer, ha gweled memez tra eun nebeud lehiou brudet.

Chom a ra ive an douristed etrezo. Penaoz e vefe mod-all ? Penaoz dond a-benn d'ober anaoudegezh da vad gand tud euz ar vro, pa vez d'an nebeuta diou pe deir gwech muioh a dud euz an diavêz en oll gêriou a zo war vord ar mor, hag a-wechou beteg deg gwech muioh en hiniennou 'zo ? Evel beuzet an hini 'vez tud ar vro e-mesk an douristed. An douristezh ne ro ket, koulz lavared, an tu d'an diavêzidi d'ober anaoudegezh gand ar re a zo o chom war ar plas - red eo da genta d'an daou du kaoud c'hoant d'an em zarempe-

di, ha ne vez ket kont evelse atao. N'eo nemed pa ver e ti gerent pe e ti vignoned, pe o loja « ti an dud », eo a vez digarez da gaoud darempred ganto. Ar Vretoned o-unan, pa h eont da leh all, e vez kont heñvel ganto.



Eur porz-plézañs

AN TRAOU ISKIZ HA DREIST-ORDINAL

Daoust ha dond a reer a-benn d'anaoud ar vro heh-unan ? Ya, sur a-walh. Mui pe vui. Rag an douristed a blij dezo memez tra gouzoud peleh e ranker beza bet, petra zo da weled ha da vizita, da beseurt goueliou e ranker mond d'ober eun dro.

Hag evid hench a anezo eo a zo bet skrivet leoriou ispisial. N'eo ket didalvoud teuler eur zell enno, kement ha gweled penaoz e vez displeget an traou enno. Rag n'eo ket an dibab a vank euz ar seurt leoriou-ze e Breiz.

Siou drezo o-unan o-deus al leoriou-hench-a-an-douristed, ha kaoud a ra din zo bet divennet zoken eun dezenn diwarno n'eus ket pell 'zo. Poueza a reont kalz war an amzer dremenet, war an amzer goz. Astenn ar gaoz a reont hardi war peza a zo « pittoresque », war an traou souezuz, iskiz, pe

dreist-ordinal. Lod a zo troet kaer ive gand folklorachou, gand ar gizioù hag ar mojennou koz. Re aliez e vez, barz al leoriou-ze, dispaket an istor a dammou bihan, ha diêz e vez kompren penaoz eo bet eet an traou war-araog en eur vro.

Daoust da ze, lod euz al leoriou-hench a n'int ket re fall. An hini diweza a zo bet embannet, gand ar gazetenn Ouest-France, a zo unan feuz ar re wella. Savet eo bet gand eur skipaill a dud renet gand Michel Renouard (2), ha kinnig a ra d'al lenner « dizoloi ar vro ». Poueza a ra, evel just, war ar pinvidigeziou a zo da weled, war an traou kuriuz, med n'e-neus ket aon da ginnig d'e lennerien tehed diwar an henchou braz ha mond dre ar re vihan, ma n'eo ket dre ar gwenojennou. Sklêr ha fraez eo e komzer euz ar hêriou anavezeta koulz ha deuz ar hêriadennou sioula.

War ar marhad, n'eo ket re glozet al leor war an amzer dremenet - e meur a gefver, daoust da ze, eo skañv an digoradur e penn kenta al leor, ha troet eo da vad da zibuna mojennou koz. Med digor a-walh eo war ar vuhez a-vremañ, war peza a ra ar Vretoned hirio war gement tachenn a zo, ekonomiezh, leoriou, kanaouennou...

Ar memez stumm o-deus, dre vraz, leoriou M. Renouard ha Jean Hureauud. Hemañ ive, en eul leor hag a zo bet embannet, mar plij, gand « Jeune Afrique » (3), e-neus renket ar hêriou dre urz al lizerennou, med n'eus ket a gaoz gantañ euz kement a gêriou. Digoroh eo avad war ar bed a-vremañ, ha seblantoud a ra Hureauud anaoud e vicher, rag leoriou all e-neus bet skrivet diwar-benn ar Spagn, ar Marok, an Tunizi, hag all... Nemed bewech pa gomz euz ekonomiezh, eo troet da weled an traou war o zu mad nemedken, evel pa ne vefe diêzamant ebed ken er vro. E stumm da skriva an anioù brezoneg pe da zisklêria euz a beleh e teu ano eur gêr bennag, n'eo ket reiz beb tro. Eul leor kaer eo avad, gand poltrejou brao e liou, ha notennou praktik e fin al leor, peza n'eus tamm ebed e leor Ouest-France.

Notennou seurt-se a vo kavet ive, ha fonnuz a-walh, an eil lodenn eul leor all a zo hemañ diwar bluenn Yann Brekilien, « leor ar vakañsou e Breiz » (4). Brekilien avad e-neus re a c'hoant d'ober skol d'e lennerien, ha doare eur helenner a zo gantañ pa zispleg d'e lennerien ez eus eur bobl euz ar Vretoned. Evel kustum, eo troet ive Yann Brekilien da veñli peb tra e Breiz, hag en e spered n'eus nemed gouarnamant kreiz Pariz da damall evid an traou n'eont ket mad. An hanter genta euz al leor a zo diwar-benn ar vro, heh istor, he gizioù koz, he zud, he hultur, heh ekonomiezh. Talvezoud a ray kentoh leor Brekilien d'an dud da glask en araog petra

d'ober euz o vankañsou e Breiz, kentoh evid da hencha anezo war ar plas.

Arabad ankouaz avad, e-touez al leoriou gwella, ar « Guide Bleu » (5). N'eo ket nevez ken, zoken ma 'z eo bet adskrivet an embannadur diweza. Lod euz ar pajennoù kenta a zo disterraet pe kosaet koulskoude. Da zisplega pezh a zo da weled e kement kêr hag e kement kêriadenn a zo, n'eus ket par, moarvad, d'ar « Guide Bleu ».

AN DOUAR O KRENA E KEMPER !

N'heller ket avad lavared kemend-all diwar-benn daou leor all am-eus etre va daouarn. An hini kenta a vez prenet gand eur bern tud hag a zo bet moulet noused gwech : ar « guide Michelin » an hini eo (6). Mezuz eo gweled petra eo. Gwelit, poltred an « **deux fermes bretonnes** » a ziskouezer deoh, war ar bajenn 15 : tier koz, goloet gand soul, ar bern teil e toull an nor, tiegeziou ha menajou deuz kant vloaz 'zo. Hag e skriver e heller kaoud bepred e Breiz « tier evel gwechall, leh m'ema an dud hag al loened dindan ar memez toenn, en eur pezh nemedken » !

Derhel a ra Michelin d'adembann e leor evel ma ne vefe bet cheñchet netra dre amañ. War-lerh ema euz degvidveziou evid eur bern traou. Taolenn an ekonomiezh dreist-oll eo a zo war-lerh. Ne oar ket petra eo deuet al labour-douar, ar beskerez nag an industri da veza. Derhel a ra da lavared, da skwer, eo gwiniz eo a vez hadet ar muia e Breiz (med euz heiz na maiz n'e-neus ket bet klevet komz, kredabl braz...). E vez savet eun nebeud moh e kement tiegez a zo, pa teu a-benn 15 % euz ar re a ra moh da werza 70 % anezo. Ema atao an hanter euz ar Vretoned o labourad douar, pezh n'eo ket gwir ken eur pennad mad a zo. Ha penn-da-benn evelse.

Talvezoud a ra ar boan, e gwirionez, lenn 30 pajenn genta ar « Guide Michelin », gand an oll faziou a zo e-barz, ar martezeadennou, an traou dibaset abaoe pell 'zo. Hag ar... perlezennou. Ar vrava perlezenn : er bajenn 12 ema, diwar-benn ar mor : « pa vez an avel-dempest o c'hweza, e vez spontuz an tarziou-mor. A-wechou, an taoliou a sko ar mor gand reier Penmarh a vez santet beteg e Kemper, 30 km alese » ! Na mui na maez.

ni plus ni moins.

N'eo ket heb rêzon n'eo ket anavezet mad Breiz e diavêz da houde...

TOULLA KAOZ GAND AN TASMANTOU...

fontaines

Ken fall all eo al leor bihan e-neus roet Jean Markale

d'embann d'an dastumadenn « Guides Marabout » (7). Diwar e ano, ne vo ket troet an nen marteze da brena anezañ da houzoud peleh mond ha petra d'ober e Breiz. Evid se eo bet savet koulskoude. Klasket e-neus Markale komz euz peb tra, deuz ar besketez koulz ha deuz al labour-douar, deuz ar artizanet koulz ha deuz ar skrivagnerien. Na pegement a faziou c'hoaz avad el leor-mañ, skrivet koulskoude gand eun den hag a ro da glevet eo eur « spialist » hag eh anavez mad danvez Breiz, sanset. Pegen mahagnet n'eo ket an anioiu brezoheg gantañ. Pegen distreset meur a wech an anioiu kêriou, hag an anioiu-tud. Diwar-benn ar brezoneg e-unan, e skriv J. Markale ez eus daou stumm da zisplega ar verb e brezoneg, pa oar kement deskard krog abaoe nebeud da studial ar gramadeg, ez eus tri.

Ha traou fentuz a skriv ive. Gwir eo, eo troet an oll leoriou-hencha-an-douristed d'ober kaoz hir diwar-benn ar mojennou koz, da zisplega pegen misteriu hag huñvrez eo ar Vretoned, hag all... N'eus ket gweloh evid Markale avad evid se. Tasmantou, emezañ, a heller en em gaoud ganto êz a-walh e Breiz. Skriva a ra zoken n'int ket euzuz tamm ebed, hag eo brao ober eun troh-kaoz ganto... Ha tud Vrenniliz, emezañ c'hoaz, a zo gwall-faltaziuz abaoe m'eo ket savet ar greizenn nukleel war zouar o farrez...

Biskoaz kemend-all ! Ober goap euz an dud a reer, pe betra ?

F.B.

- (1) - Eun daolenn vad euz pezh ez eo an douristelez e Breiz a vo kavet el leor « Géographie de la Bretagne », embannet gand Skol Vreiz, en bved pennad. Skrivet eo bet gand P.Y. Rhun.
- (2) - Michel Renouard. Guide de la Bretagne. Ouest-France.
- (3) - Jean Huresu. La Bretagne Aujourd'hui. Editions Jeune Afrique.
- (4) - Yann Brekilien. Le Livre des vacances en Bretagne. Nature et Bretagne.
- (5) - Georges Monmarché. Bretagne. Les Guides Bleus. Hachette.
- (6) - Bretagne. Pneu Michelin.
- (7) - Jean Markale. Traditions de Bretagne. Marabout.

Petra 'dalvez istoriou Asteriks ha Lucky Lucke e brezoneg ?

Ar miziou diweza-mañ, eo deuet er-mêz an droidigez vrezonég euz meur a « vandenn dreset » - er stumm-mañ eo e vez anvet ar « bandes dessinées » e brezoneg lennegel. Asteriks eo a zo bet an hini kenta o komz brezoneg, ha da gredi 'zo e oa an dud o hortoz an dra-ze, rag eun nebeud deveziou goude ma oa bet lakaet an 3.000 skouerenn a oa bet moulet e gwerz, ne veze kavet hini ebed da brena ken (1). Eur pennad amzer da houde, eo unan euz istoriou Lucky Lucke, hini « Ma Dalton », eo a zo bet embannet (2). Ha setu nevez 'zo eun eilved leor Asteriks o tigouezoud, a wech-mañ « Asteriks hag emgann ar pennou » (1).

Siwaz, ma 'z eo bet ha ma vez gwerzet mad an albomou-ze, meur a hini eo kouezet gantañ e viz-meud en e zorn o lenn anezo. Poan o-deus bet ar peb brasa, kredabl braz, o lonka dreist-oll istoriou Asteriks, e-giz m'int bet displeget e brezoneg. Petra 'zo da zoñjal e gwirionez euz an troidigeziou-ze ?

Bez' e ranker lavared 'zo peadra da goll kalon buan a-walh. Setu amañ, na mui na maez, penaoz e kroger da gonta deom « emgann ar pennou » :

« En amzer gouzalchidigezh Galia gant ar Romaned, e oa daou rumm Galianed... Diouzh un tu, ar re a zarbenne ar peoc'h roman hag a glaske emazasaat ouzh stuzegezh trec'h an alouberion... Diouzh un tu all, ar C'halianed all diffezhus... ».

Ma n'eo ket ken « stard » an droidigez penn-da-benn, ha ma kaver gwech ha gwech all eur bomm-lavar brao bennag, diêz eo kredi e hellfe eur seurt brezoneg beza kavet fraez gand ar peb brasa euz ar vrezonegerien.

Daou dra a heller tamall dreist-oll da dud Preder - inti eo o-deus laketa albomou Asteriks e brezoneg. N'heller ket lavared eo bet troet dalhmad an istoriou ger evid ger diwar ar galleg. Med pouez ha levezon ar galleg a vez santet re aliez.

Enklaskerien evel Jules Gros o-deus diskouezet mad koulskoude nevez 'zo c'hoaz n'eo ket heñvel ar stumm da zisplega ar mennoziou hag ar santiman-chou e brezoneg hag e galleg. Ha F. Kervella ive, pell a-walh a zo dija, e-neus skrivet en e yezadur :

« Kentac'h eget ober gant gerioù hir diverzek en : -adel, -adur, adurazh, -idigezh, -adelezh, hag all, e vo graet gant gerioù doareet (...) E-lec'h : dispennidigezh ar c'harregennou dindan nerzh an doureier, e vo gelllet lavarout : an doureier, o tispenn ar c'harregennou. » Setu aze eur reolenn ha ne zeblant ket tud Preder anaoud tamm ebed.

Ken gwaz all a zo. Rag, netra ken nemed en teir frazenn genta on-eus tennet euz eil leor Asteriks, ez eus eun hanter dousenn bennag a heriou... ha n'emaint e geniadur ebed. Ha penn-da-benn, pe dost, evelse. E-leh ober gand « evaj », e reer evel just gand « died », eur ger hag a zeblant mad koulskoude, diwar geniadur istorel R. Hemon, ez eo bet F. Vallée o tiskoacha anezañ er Hatolikon koz. Ober a ra tud Preder gand « lestraz » evid displega « armevor », ha gand « luoz » e-leh « arme ». Gand « annez » - daoust ma vez kavet aliesoh er skridou lennegel, e teu deom ive euz ar brezoneg krenn - e-leh « chom », re zimpl moarvad da veza dalhet...

Bewech, war a zeblant, ez eur bet o klask ar ger en diêsa da intent d'ar brezoneg etre, ar ger kosa pe an nevesa hervez an dro, an hini an nebeuta anavezet da vihanna. Pa vije bet dileet er hontrou beza bet klasket ar stumm äsa, an hini eeuna, an hini tosta ouz ar yez komzet, dreist-oll p'eo eur vandenn dreset eo a oa da drei. E galleg, hag er yezou all ive emichañs, e vez savet ar bannou treset dezo da veza lennet brao gand ar muia posubl a dud. Evid ar brezoneg, eo ar hontrou eo a zo bet greet.

Med ar re-ze eo evel just ar gerioù nevez hag a lavar lod 'zo kement a ezomm da ijina anezo evid ma vefe ar brezoneg « modern », pe gentoh - digarezit ahanon - euz an amzer-vremañ, « ar-nevez » na petra 'ta. Ar brezoneg arneveze, evel m'e-neus anzavet G. Pennaod, n'e-neus netra da weled ken gand brezoneg an oll. N'eo ket souezuz neuze ez eus bet kemend-all ha n'int deuet biskoaz a-benn da lenn Asteriks. Chomet zo meur a hini boud dioustu, hag ez int bet digalonekaet. Lod all a zo en em laketa dre deir pe beder gwech, hag a zo chomet sahet c'hoaz.

E gwirionez, gweloh o-deus kavet tud Preder sevel eur skrid evid o flijadur o-unan, ma ne vefe ket re a dud e diavêz dezo o kompren o c'hoariougerioù hag an tezennoù o-deus klasket displega dre istor farsuz Asteriks. Gaou avad eo a ra seurt taolioù, ha tamm vad ebed.

Re Skol an Emsav e-neus fellet dezo ober gweloh ha propoh, hag an digarez kenta eo bet o hini da zevel eun droidigez vrezonég euz Lucky Lucke, hervez

m'o-deus skrivet, eo e vije eun taol-bruderez, evid ma teuje an dud da gompren n'eo ket stag ar brezoneg tamm ebed ouz breizekachoù nag ouz traou a-wechall. Hag e heller lavared dioustu eo kalz flourroù « Ma Dalton » da lenn.

Lavared o-deus ive tud Skol an Emsav avad e hell beza beteg « disheñvel-tre » ar skrid brezoneg diouz an hini galleg. Koulskoude, ma zo eun tamall hag a heller ober outo, eo just a-walh beza chomet re dost, kalz re dost, ouz an destenn halleg. Diwallet o-deus d'ober gand gerioù « arnevez », hag eur perzmad eo kement-mañ dija. Med yen e kaver an droidigez a-benn ar fin, ha dont a ra kement-se, sur, n'eo ket diwar-goust m'eo iskiz an taol kenta gwelad eur how-boy o kaezel brezoneg, med dre ma n'eo ket « skafiv » a-walh o brezoneg gand paotred Skol an Emsav.

Duspenn ma n'int ket bet evid en em ziober diouz levezon an destenn halleg, o-deus ive dibabet aliez stummoù lennegel. Sed e kouezer war frazennoù kamm ha reud evel homañ : « Ho laketa em-eus da zont o vezañ m'eo bet Ma o tagan ti-bank Tumblewed Town... » E-leh : « Lakaet em-eus ahanoh... » (3).

Red e vije kompren eur wech da vad eo komz eo a ra personajoù ar bannou treset. Diwar neuze, pebez labour vad a hellje beza greet...

Ha barz ar gont-se, an traouigoù bihan all a-dreuz - eur ger skrivet fall amañ, unan all ankouet aze (4) - ne vefe ket taolet a evez outo. Ha lenn eur vandenn dreset e brezoneg a deufe neuze da veza eur wir blijadur.

F. B.

(1) - Dargaud embanner. Amor Diffusion, Roazon.

(2) - Skol an Emsav, B.P. 1, 22 Plejidi.

(3) - Ha gweloh c'hoaz moarvad : « Goulennet em-eus digannech dont... ».

(4) - Iskiz e kaver lenn « dour ebet ken », e-leh « banna dour ebet ken ».

PRENIT HA KINNIGIT LEVRIOU BRUD NEVEZ :

Karantez ha Karantez GAND Naig Rozmor

Barzonegou a garantez ha barzonegou goapauz.
*Biskoaz c'hoaz ne oa bet skrivet seurt barzonegou
en ar yez !*

18 lur + 2,75 lur mizou-kas

Lapous-den Penn ar Bed

renket diwar saozneg J.-M. SYNGE
gand C'HOARIVA BREZONEG PENN-AR-BED

*Iwerzoniz, a lavare e damallarerien da Synge,
ne oant ket evelse...*

10 lur + 2,75 lur a vizou-kas

AN DAOU.LEVR EVID 28 LUR (heb mizou-kas).

C.C.P. P.-M. Mevel 1499-55 Rennes.

BRUD AR YEZ HAG AR VRO

PESEURT LEOR AN HINI GWELLA DA ZESKI BREZONEG ?

E « Nevez-amzer » (Kazetenn stourm ar
vrezonegerien e bro-Leon, n° 12, miz
gouere), ez eus eur pennad diwar-benn
al leoriou da zeski brezoneg, hag a lako
meur a hini da skrijal, pe da c'hoarzin.
Savet eo bet gand Mikael Madeg, hag
e-neus desket bremañ ar vicher a gelen-
ner. Pehini eo al leor gwella neuze ?
N'eus hini ebed, emezañ, hag a vefe
mad evid an oll.

— Leoriou Visant Seitè : « daou vank
spontuz a zo enno » : faziou pedagogieg,
ha faziou eneb ijin don ar yez.

— Leoriou R. Hemon : « ken didalvez
all », n'int ket bet nevezet abaoe 50
vloaz, ha « keid ha ma ne vo ket implijet
leoriou estreged re R. Hemon, eo red
disfizioud diouz ar skol dre lizer « go-
sa », Skol Ober. »

— Leor Tricoire : nemed traou blaz ar
hoz enno, ha dizurz el leor a-bez. Mad
evid sperejou faltaziuz.

— Hini P. Denez, « Brezhoneg buan
hag aes » : displegadennou digompren-
nuz, mad evid studieren war ar yezou,
evid tud spreddeg-kaer, ha « mad-kenan
evid e-leiz a gelennerien war ar brezo-
neg, hag en doare-ze evid P. Denez
e-unan »...

— An Assimil, gand F. Morvanou : eur
meskej penn-da-benn, gand stummu
rannyezel a-verniou, « mad d'ar ra
o-deus eur memor-kaer hag eur hov
don. » « Eun heug » ar meuleidiou greet
d'al leor er « People Breton ».

Setu aze hag a zo... dispaket ! Kaoud a
ra evelato da V. Madeg eo « skliër »
leoriou nevez V. Seitè, ha mad an Assi-
mil da beurzeski brezoneg, da weled
penaoz eo ar rannyezoù all. Med ne
lavar ger ebed euz meur a zoare all da
zeski brezoneg, evel an doare « dre
zelled, klevet, komz ha lenn », bet savet
gand Yann an Du hag Ifig ar Berr.
Moarvad ne dalveze ket ar boan ?

AR RADIO BREZONEG E-PAD AN HANV

Derhel a ra ar peb brasa euz an aba-
dennou brezoneg da veza skignet e-pad
an hanv, koulz er radio hag en tele. Evel
a oa bet kont dija warlene, evid ar wech
kenta, e vez keleier beb mintin da 7 eur
20. Med da greisteiz 20 ne vez ket ken.
Keleier en... alamaneg eo a vez skignet,
damdost d'ar memez eur, gand Radio an
Arvorig. Emgleo Breiz e-neus savet e
vouez a-eneb doareou FR 3, dre ma vez
eun hanter nebeut-ha vrezoneg, war ar
pemdeiz, e-pad an hanv.

LEORIOU'ISTOR NEVEZ

Embannet zo bet meur a leor nevez e galleg ar zizuniou-mañ, diwar-benn istor Breiz. Eun nebeud miziou 'zo dija, e-noa Alain Deniel skrivet « Le mouvement breton » (e ti Maspero), eur studiadenn gand kalzig traou nevez e-barz, diwar-benn an emzao e Breiz etre an daou vrezel. War ar memez sujed, ema Anna Youenou oh embann he zrede leor diwar-benn he gwaz, Fransez Debeauvais. Euz 1939 da 1942 ez a hemañ, hag a zo kenteliuz e meur a geñver, dreist-oll diwar-benn pezh e oa Debeauvais ha re all o hortoz a-berz an Alamanted.

Yann Brekilien, diouz e du, e-neus roet eur pezh « Histoire de Bretagne » d'embann da Hachette. « Istor eun nasion » eo e-neus skrivet. Med dislaret eo ker-kent en eul leor all nevez deuet er-mêz ive, gand Yannick Guin : « Histoire de la Bretagne de 1789 à nos jours » (e ti Maspero c'hoaz). N'eus nemed spere-deien, eme Y. Guin, o kredi eo Breiz

eun nasion, ha da renkadoù ar viche-rourien hag ar beizanted d'en em gleved, emezañ ouspenn, evid chench an traou e Breiz.

An droidigez e-neus greet Y. ar Berr euz « Emgann Kergidu » (e ti Laffont), ez eus araozi eur studiadenn 20 pajenn diwar-benn bro-Leon ha bed Lan Inisan en 19^{ved} kantved.

Eul leor diweza a zo bet laket e gwerz gand ar PUF : « Régions et régionalisme en France du XVIII^e siècle à nos jours » : eur renta-kont euz deveziou-studi bet dalhet e Strasbourg gand kelennerien ha klaskerien skoliou-meur. Eur pennad a zo gand Michel Denis diwar-benn « Mouvement breton et fascisme ».

En oll, danvez-lenn, ha danvez prederia, eta.

EMBANNADURIOU EMGLEO BREIZ

Evid studi pe kelenn ar yez :

* KOMZOM, LENNOM HA SKRIVOM BREZONEG, gand J. Tricoire

Diou levrenn : Kenta lodenn - Eil lodenn	pephini :	25	F
Diou bladenn da heul al lodenn genta (KLT)	24 ha	28,50	F
Eur gasetennig e brezoneg Leon, da heul an eil levrenn	40	F	
Evid Bro-Wened : eur gasetennig evid al lodenn genta	30	F	

* AR BREZONEG DRE RADIO, LE BRETON PAR LES ONDES, gand V. Sèité

Daou levr :

Kenta levr, (evid ar re a zo o kregi gand ar studi)	17,50	F	
Eil levr (eil bloavezh)	19,50	F	
Eur gasetennig da heul peb levr	pephini :	30	F

* Al levriou-ze eo a vez implijet gand ar Henteliou dre lizer-mañ :

- Levriou J. Tricoire : Kenteliou dre Lizer Skol ar Merher, A. Merser, 6, ru Beaumarchais, 29200 Brest

- Levriou V. Sèité : Skol dre lizer, V. Sèité, Ti-Carré, 29150 Kastellin

Da veza goulennet en oll staliou-levriou pe digand :

EMGLEO BREIZ, B.P. 17, - 29266 Brest Cedex

C.C.P. EMGLEO BREIZ, 1649-07 U Rennes

En niverenn-mañ, e vo kavet de lenn :

- eun danevell diwar bluenn J. Abasq : istor eur helenner war e retred o kosaad, paotr e-unan, laer lizerou, strafuillet gand eur vaouez yaouank ha youleg o chom er memez ti hag eñ, hag a zav ennañ ar c'hoant iskiz da zarempredi anezi...

- notennou mesk-ha-mesk diwar-benn an douristed e Breiz, hag al leoriou da henchha anezo : daou euz al leoriou-mañ dreist-oll, hini J. Markale hag ar « Guide Michelin », a zo souezuz e meur a geñver...

- eur renta-kont : petra 'dalvez istoriou Asteriks ha Lucky Lucke e brezoneg ?

Au sommaire de ce numéro :

- une nouvelle de J. Abasq : l'histoire d'un enseignant en retraite, seul avec ses désirs et ses obsessions, qui en vient à voler le courrier d'une jeune femme de son immeuble...

- des notes sur le tourisme en Bretagne, et en particulier, sur les guides touristiques, dont deux, celui de J. Markale et le guide Michelin, sont pour le moins surprenants.

- un compte-rendu : que penser des traductions en breton des albums d'Astérix et de Lucky Lucke ?